

KINNIAD EUR MIGNON

D'An Aotro CAMUS, Person neve Tremel

Deut oun, aman, gant eur mignon,
Joas ha trist, eo ma c'halon :
Kenta kure a Lann-Huon
Azo roet d'eoc'h da Person.

Aotro, poaniet c'heuz, pad pemp ploaz,
Enn Lann-Huon, deuz ho gwellan.
Kovez ha gwelet ar bevien
Kæran enor, kæran loden!

Enn Lann-Huon c'hwi zo karet,
Hep diskwizan c'heuz labouret
Ha gant Pasko ar vugale
'Vid'hoc'h nag a boan noz-veure!

Mad oc'h bet vit ar glanvourien,
Mad d'ho souten ha d'ho c'helen.
Mad'vit ar chorf hag ann ine
Labouret c'heuz 'vit gloar Doue.

Enn Tremel a zo tud kristen
Hag a gar kalz ho beleïen :
Eur prespytoar kær deuz savet
Kaër eo ho Ilis vinniget .

N'ho peret zo eur c'halvar gaër
Neubut ken brao gwelet n'haller.
Ze a diskwe feiz ho tado :
C'hwi kenkerzo war ho roujo .

Aman zo kalz a vokedo,
Hep mar n'ho mesk a zo piko :
Mez lesen Doue zo c'heuillet
Chwi vo bepret katoliket.

Aotro, kuitet, c'heuz Lann-Huon
Ann oll ho kare a galon.
Tud Tremel eunn dra a c'houlan
Karet ho Person, vel ma ran !

ERVOAN HERNOT,

Kizeller en Lann-Huon ha marc'hek deuz
breuriez St-Gregoar.